


TARZE



Kasit ho
lizhiri da:
Ronan Joleiz
40 rue de Bretagne
PARIS



Ezhomm am boa goulou
wit lenn "TARZE"

Tennet eo bet
eus an niverenn-mañ
100 skouerenn
nemet ken
niverennet eus
1 da 100.

An enor hoch
eus da gaout
an niverenn; 37.

Ma Krog ennout ar c'hoant
skrivañ,
Arabat displeganñ re hir
Peraos e valeez da gi war al
leur

Yellen (Perc'hindour)

A^N T^AR^ZH N^EV^EZ

Ar mor a zo un. Ar gwagennoù a gemm o livioù hag e c'hellont bezañ heñvel o stumm... pe disheñvel... Pezh a zo sur avat eo : pa darzh unan anezho n'eus ket mui anezhi.

Ha setu ma teu war an draezhenn (-aour, hervez tud 'zo, -ludu, hervez tud all) traezhenn an emsav, un houlenñ nevez, ur wagenn nevez, hân Hini hag a red war-lerc'h ar re a zo en hor raok.

Arabat deoc'h krediñ ez omp dispac'herien a fell dezho teurel ar brall war ar gwagennoù kent. Goût 'ouzomp ervat ne vefe ket ac'hanomp mar ne vije ket bet tarzhioù all en hor raok. Goût 'ouzomp ivez e vo tarzhioù all war hol lerc'h.

N'omp nemet un tarz. Gwagennoù 'zo a zo hir, re all berr. Hetomp buz ha buhez hir d'hon hini. Ra vo hon Tarzh ar milstrinkadenn anezhañ Had littenek.

||||||||||||||||||||||||||||||||||||||||

A^LI D^AO L^EN^ER^EI^N . . .

Ar re yaouank en Emsav a zo treut o boued. N'eus nemet Ar Vro hag Al Liamm a rofe un tamm kreun dezho. Adal maz eo bet unanet "YAOUANKIZ" gant "STURIER" ez eo trimiziek ar gasadenn. N'eo ket a-walc'h ! Setu perak e kav deomp e vez ezhomm eus ur gelaouenn a vo kelaouenn an deskarded war ar brezhoneg. An dud a zesk hor yezh a zo niverusoc'h-niverusañ. Ret eo kaout ur gazetenn digor evito, ar pennadoù anezhi na vo ket marteze peurlipet o brezhoneg met talvoudus e vint rak strivoù ez int. Amañ e fell deomp pouezañ war un dra diskouezit dichipot ar fazioù a reomp. Gwezh ebet ne resev un den yaouank evezhiadennoù war e bennadoù. Ur wezh avat en deus degemeret Gwennole ul lizher a-seurt-se war-lerc'h ur pennad ennañ e rae rebechoù d'ar B.B. (ne gomzan ket eus Brigitte Bardot met eus ar Bleun Brug). Met n'hellomp ket skrivañ rebechoù nemet-ken !

Ar gelaouenn-mañ a glasko mont er-maez an aliesañ ar gwellañ. Peder pe bemp niverenn a glaskimp kas a-raok ar vakañsoù bras. Digant pep-hini ac'hanoc'h e c'houlennomp hon harpañ dre gas timbroù. Na c'houlennomp ker arc'hant nemet ma vije tud prest d'hen ober. Skrivit deomp ho soñj ha lakait timbroù en ho lizher. N'eo ket hor pal sevel ur gelaouenn gant ur bern koumananterien. Pezh a blijfe deomp ober eo bodañ ar re yaouank en-dro d'ur gelaouenn evit e foulzañ da vevañ e-giz Breizhiz. ha netra ken. N'eo ket abalamour n'int ket stank an dud a sell ouzh ar Steredenn n'emañ ket splann an oabl.

ALI D'AR RE YAOUANK... HA D'AR RE ALL...

1°) D'ar re yaouank : ar gelaouenn-mañ a zle bezañ kelaouenn an holl ac'hanomp. Kasit ho pennadoù, ho tresadennoù. Ma vez fazioù gant ho prezhoneg e vint lamet kuit.

2°) D'ar re all...

Embann a raimp gant plijadur istorioù farsus, tresadennoù mousfent ha kuzulioù d'ar re yaouank. Met n'hon eus ket ezhomm eus pennadoù a c'hellfe kavout repu e-barzh Al Liamm pe en ur gelaouenn all bennak. G.S. Evit an tresadennoù, n'hellomp embann nemet an tresadennoù graet ~~gm~~ gant linennoù eeun hep skeud.

Lizher d'an "Times".

Aotrou,

War ar pont a stago hepdale Bro-C'Hall da Vro-Saoz e vije ret lakaat ar c'hirri o vont davet Bro-C'Hall da veajiñ war gostez dehoù an hent evit kemer boaz ar vro emaint o vont enni. En hevelep doare hag evit an hevelep abeg e vije ret d'ar c'hirri o tont eus Bro-C'Hall beajiñ war an tu kleiz.

Da zeskiñ dindan eñvor evit distagellañ ho teod.

C'HWEC'H MERC'H GWERC'H
WAR C'HWEC'H SAC'H KERC'H
O VONT D'AR MARC'HALLAC'H
WAR C'HWEC'H MARC'H KALLOC'H BALC'H.

AR BREZHONEG EN TIEGEZHIOÙ

A-bouez eo diskouez d'ar re yaouank skouerioù an tiegezhioù oc'h ober gant ar brezhoneg. Evit gouzout hiroc'h war e implij evit gouzout penaos o deus graet an nevez-brezhonegerien evit dont a-benn d'obâr eus ar brezhoneg yezh pemdeziek an tiegezh hon eus savet un enklask. Goulenn a reomp digant pep tiegezh a gomz hor yezh muioc'h pe nebeutoc'h goulenn ar folennoù enklask digant :

Gwennole Le MENN - 3 rue Francis Garnier PARIS (XVII°)

SPERED AR VRO.

Hor soñj eo adembann pennadoù 'zo talvoudus war a gredomp. Kalz ac'hanomp siwazh a zo gwall-dreut o dastumad levrioù e brezhoneg. Ha koulskoude eo pouezus-kenañ o lenn evit ober al liamm gant strivoù an dud a oa en hor raok.

E 1903, e save Tangi MALMANCHE ur gelaouenn "Spered ar Vro". Diouzh e bennad-digeriñ e tennomp ar pezh a zo da heul.

B E Z O M P "N I H O N U N A N" .

... Ar re-se, me 'gav din - me 'fell din da lavaret ar re n'eo doa ganto nemet o c'hoant d'ober vad - ho deus lakaet en araok, evit difenn ar Yezh, un dra hep-ken : he c'hozhi. "Ar brezhoneg a oa giz-prezeg hor gourdadoù - emezo - ni 'rank eta komz brezhoneg ivez. Koulz lavaret, a gav din : "Setu amañ bragez va zad-kozh arabat din-me dougen ur vragez all, abalamour maz eo houmañ hini va zad-kozh".

Kement-se a zo brav. Mez n'eo ket a-walc'h eo. Rak lakaat a raer ar bragoù kozh er c'houfr, ne wisker anezho avat, peurliesañ. Lavaret a ran muioc'h zoken : Mar bez gwir ne dalfe ar brezhoneg e-giz a zisplege ar memes gazetenn nemet da "ober d'ar Frañsizien derc'hel soñj eus ar Gelted", koulz e ve din-me, feiz, e vije troc'het o zeod diouzhtu d'ar milion bennak a dud pere a gomz brezhoneg, ha din-me da gentañ, kentoc'h eget gouzout din n'her c'homzomp nemet evit ober plijadur da un nebeut tud gouiziek. Nann. Tud a-walc'h o deus komzet eus ar C'helted hag eus an amzer dremenet. Me 'garfe d'am zro displegañ un nebeut traou abalamour d'ar Vretoned en amzer-vremañ ha dreist-holl d'o bugale en amzer da zont.

... Daoust peger bras a vezo an unanded e Frañs, ne vezo ket miret ouzh an dud da vezañ pe dev pe dreut, pe drist pe laouen. Ne vezo ket miret outo da vezañ disheñvel a zoare hervez ar broioù. Ne vezo ket miret ouzh broioù disheñvel da vezañ disheñvel a spered.

Petra eo eta spered ur vro ?

Unan bennak - pe egile - en deus lavaret : "Va zok eo va zok-me o vezañ ma n'eo ket tok un all eo. "Kement-se ne lavar ket kalz e doare. Koulskoude n'oufen kaout tro welloc'h evit displegañ petra eo spered ur vro. Spered ur vro bennak a zo spered ar vro-se, o vezañ n'eo ket spered ur vro all eo. Pep bro, pep pobl he deus he giz-hi da soñjal, he-giz-hi da welout, he giz-hi da lavarout, he giz-hi da ober. Bez ' he deus he vertuzioù-hi hag he zechoù-hi. En em ziskouez a ra hi he-unan e pep tro. Dispar eo. Hag, o vezañ maz eo dispar, ez eo kaer, kreñv, bras e kement a ra.

En ur vro, ur spered all a deu atav da vezañ ur spered fall. Da gentañ, un dra anat eo e vez aesoc'h kemeret ur pleg fall eget unan mat. Mez gwasoc'h a zo

.../...

c'hoazh : ur perzh hag a zo mat gant un eil bobl a zeu purliesañ da vezañ fall gant eben. Dre gemeret skouer diouzh ur bobl gae a spered, ur bobl all trist a spered na deuis kalz a-wechoù da netra nemet da vezañ diot hag iskiz. Rak-se, n'eus netra falloc'h en ur vro eget ar spered a heñvelidigezh. Gant ar spered-se e teu, hep mañ ebet, n'eus forzh pe vro da vezañ disheñvel diouti he-unan ha maz eo ar marmouz diouzh an den, an diaoul diouzh Doue.

Ar wirionez-se a zo anavezet a-bell 'zo. Mez ar gwirionezioù kozh a zo c'hoazh ar re wellañ.

...Ur vro hag he deus c'hoant da viret he spered-hi a dle eta kaout he lizheradur-hi (lizheradur = lennegezh). Hag evit-se e tle hi, da gentañ, mirout he yezh hi. Ur vro hag a goll he yezh a goll e spered er memes taol.

Ya, gouzout a ran : n'eo ket ar wiskamant eo a ra ar ~~wisk~~ beleg. Anat eo kement-se. Anat eo ivez e vez kustum ur beleg d'en em wiskañ e beleg ha nann e miliner. Moarvat, hag heñ gwisket e miliner e rafe e vicher memes tra. Mez kerse a vije kement-se gant an holl. Ha ne ne gav ket din, a-benn ar fin, e vije gant e brezegenoù kement a dalvoudegezh, paz eo gwir, dre wellet ur miliner, e soñjer kentoc'h en Ifern eget er Baradoz !

Spered ar Vretoned en deus e wiskamant ; ar Brezhoneg. Perak outa amprestañ hini an amezeg ? An netra gemer dilhad un all a gemer ivez e c'hwen.

Krediñ a raer a-walc'h e Breizh e c'heller fiziout er bobl (me 'fell din lavarout er re vunut, er re diouziiek) evit difenn ar yezh. Hogen faziañ a raer, n'em eus ket ach d'hen disklêriañ, ha pa rankfen ~~bezañ~~ lekaet kaner fall.

Ar bobl ne ra forzh ebet eus he giz-prezeg. He mervat a ra, moarvat, dre voaz ; n'her difenne ket avat, dre gefridi, pa ouezo ur chiz all. Rak ar bobl n'oar ket petra eo ar superflu. Koment tra ha n'he deus ket ezhomm anezhi e lavar ez eo didalvez. Pa n'he devezo mui ezhomm eus ar brezhoneg e tilezo anezhañ.

... Hag un dra souezhus a-walc'h a c'hoarvez en amzer-mañ : e-pad ma teu ar bobl da zilezel ar brezhoneg, ez a an dud desket da gemerout damant dezhañ. Rak-se e c'heller lavarout : Neb a fell dezhañ labourat evit ar bobl a rank bremañ labourat evit an dud desket.

G. S. Da brederiañ.

-Me 'fell din dimeziñ gant he merc'h.

-Ha gwelet hoc'h eus va gwreg ?

-Ya, met ne gav gwelloc'h he merc'h c'hoazh.

-Perak e youc'h ken kreñv an den-mañ ?

-Kont a ra outañ e-unan ha bouzar-glez eo !

PERAK E CHOMAN-ME... ?

Perak e choman-me va-unan-kaer er bed
Tra m'emañ ar re 'rall bev ha gerc'h ha nerzhet !

Perak e choman-me hep gortoz na goanag
Pep-unan e-tal din a c'hoari hag a vrag !

Perak e choamn-me va-unan da c'hortoz
Anken lan va c'halon divevet hed an noz !

Perak e choman-me va-unan diouzh va zu
Divouezh an traou am divred e dan an ebr du !

Perak e choman-me da genilañ an tan
Hag a bob va c'halon : he dilan a lekan !

Perak e choman-me va-unan diziwez
HI nendeo ket c'hoazh denet da reiñ din karanjez !

Perak e choman-me va-unan-kaer er bed
Gwellaet e vo ganti da'm c'halon glac'haret !

Perak e choman-me digalon a-wezhioù
Hep gortoz na goanag da zisamm va foanioù !

GORTOZ ha GOANAG
HI a eilgerio din
Ha ne vanin ket ken va-unan-kaer er bed !

abEnnez *

8 C'Hwevrer 1963.

TUD VEUR hor Bro-ni

YANN IVE, DUG REUZ

An talbenn-mañ "tud veur hor Bro-ni" a dalv hag a dalvo evidon da skrivañ pennadoù a-zivout tud o deus gwraet berzh en o hoalad - e doare pe zoare. O vezañ ne vez ket desket da vugale BREIZH Hanez hor Bro, deomp-ni d'henn ober enta !

YANN IVE, mab henañ da Frañsez Dug Reuz ha da Chann Roc'han - douarenez Yann IVE Dug Breizh - "tud a uhelouenn" gouez d'an dihelloù - a c'hanas s'ar 27 a viz Mezheven 1447. Ur neurzh e oa, e gre Frañsez ar c'hentañ, Dug BREIZH

Pa yeas e dad da Anaon, er bloavezh 1458, e teuas Yann da Aotrou Reuz, ar Roc'h-Kreñv, Asereg, Kastell-Nez, Nez-eh-Poled h.a., kont Harcourt, beskont Aumale...

.../...

Monet a reas da vrezel ar "Bien-Public" gant Frañsez an Eil, Dug Breizh, ha sinañ ar c'henfeur arsav-brezel etre Roue Bro-C'Hall ha Dug Breizh.

E 1470, e voe anvet da Gadlevier (sn. Marshal) Breizh ; hag e miz Gwengolo 1472, Penngadour Luoz an Dug ha Bleiner Roazon/"Capitaine de Rennes"/.

E 1471, e teuas dezhañ Aotronezh an Argoad (bras-kenañ ar greizenn anezhi e parrez Elven, daou lezvarn kreñv o beli e Gwened hag en Alre) hag heni Malastreg, hag e 1478 lec'hioù all c'hoazh. Un den meur e oa e-touezh Uhelidi hor Bro.

E 1474, e voe bac'het Herri TUDOR e kastell an Argoad. Henezh tec'het kuit diouzh Breizh goude a zeuas a-benn da c'honez Rouantelezh Bro-Saoz. Anavezet eo gant an Hanez evel HERRI VII. Tad diazeour Iliz Bro-Saoz an heni eo.

Bez' edo Yann IVE e Kendalc'h Breudoù Breizh e Gwened.

Ha neuze e teuomp da gomz eus Arvell LANDAIS. Tefzorer an Dugelezh e oa henezh. Keniriennañ a reas Reuz hag Uhelidi arall a Vreizh, taget gant ar warizi ouzh Landais. Tarzhañ a reas an traou da vare marv ar C'henseller Gwilhoù CHAUVIN, en toull-bac'h (5 a viz Henoal 1484). Tamallet e voe bet ouzh Landais bout e lakaet da vervel.

E Montargis, d'an 22 a viz Henoal, e voe sinet ur c'henfeur etre ANNA de BEAUJEU, lezrouanez Bro-C'Hall hag Aotrouion Vreizh, oc'h anaout CHARLEZ VIII evel hêr hervez al lezenn da Nicole de BROSSE.

Al Lezrouanez a lakaas arvell da sevel etre Dug Breizh ha tudjentil Bro-C'Hall hag a gasas ul luad ouzh Breizh. Gonidet e voe Redon ^(I) dezhe (1487) ha Gwened da c'houde (Kalañ Mezheven 1487).

En Ancenis e tegemere Dug Reuz Uhelidi Bro-C'Hall, tra ma savete Redon re Wened.

Neozh ne voe ket dalc'het d'ar c'henfeur gant ANNA de BEAUJEU. REUZ neuze a gemmas penn d'ar vazh a vestronias Kastellvrien en anv an Dug ha Gwened da heul (3 Meurzh 1488).

E penn Kentluad an Dugelezh en em gavas Dug REUZ e S. Albin an Hiliber - un drouziwez evit Breizh (28 Gourzheren 1488). Repuiñ a reas gant dilerc'hadoù ar c'hentlu e Dinan. Aze voe diwez da Rezid Breizh dre douelladenn hon Uhelidi ha dre c'hevier ha barad lezrouanez Bro-C'Hall.

Anvet e voe Yann IVE gant Frañsez an Eil da Ward e verc'h ANNA, II vloaz anezhi. Mervel a reas gant glac'har diwezhañ Dug hor Bro.

Klask a reas Dug REUZ dimeziñ ANNA da Aotrou ALBRED "ur c'hozhiad, mezhier, divalav, nac'hagnet daouzek a vugale dezhañ". Diwar he nac'h e voe regaset ANNA diouzh Naoned. Anna a repuas e Roazon ha Reuz a blegas d'e adverc'h.

Goude-se e tougas anezhi da zemeziñ gant CHARLEZ VIII, roue Bro-C'Hall evit echu gant ar brezel.

Monet a reas Yann IVe da vrezeliañ en Italia, er Roussillon...

Tra ma voe gant LOEIZ XII e Bro-Vilano (I5II) e voe kaset kemenn dezhañ eus mennad ar Saozon da aloubiñ Breizh. Donet a reas en-dro d'e vro gant ar pennanv a "lieutenant-général". Tolpañ a reas en-dro dr Breudoù evit kaout an arc'hant ret da lakaat maez ar vro an enebour ha ne zeuas ket...

Mervel a reas Yann IVe, Dug REUZ, nebeut amzer goude, d'an 9 a viz C'Hwevrer I5I9 "gant ar brud da vezañ bet ur bleinour mat ken evit ar brezel ke n evit ar peoc'h" (BRANTOME). Sebeliet e voe en Iliz Kordennidi Ancenis. Aze eo e chomas e vez betek dispac'h Bro-C'Hall.

abEnnez.

Notenn (I) : Ur gammdro a voe c'hoariet da REUZ gant an darvoudoù. Harzet e voe e wreg Glaoda de MAILLE gant Uhelidi Brp-C'Hall. Daskoret e voe dezhañ evelkent a-drugarez d'ar Roue.

VA UNANIK
=====

Ur paourkaezh krennard on - Va-unanik,
Trist va c'halon hep ur c'haredig -
Pep tra em eus bet - War ar bed-mañ
Met ~~me~~ am eus c'hoant - 'R garantez c'hwekañ
Ur garantez, ur garantez - A dalv un añ
C'Hoant da glevout - Komzoù ar re flourañ,
C'Hoant da glevout - Unan lâroust :
"Dal va c'harantez - 'Vit noz ha dez !"
Va c'hlevit, va c'hlevit mat va zud kaezh
Lavarit de'i - Donet davedon,
Me 'gar ane'i. Pedet 'm eus don :
An neñv 'm eus pedet,
'Vit kaout unan, Unan da garet...

Trôet diwar an amerikaneg -
"Lonely Boy"
gant Paol ANKA.

UR BREIZHAD WAR AL LOAR...

Lennet hon eus gant souezh e oa un den war al loar. Hag arabat deoc'h mousc'hoarzhin. Gwelet eo bet. Ur stumm iskiz a zo gantañ. Emañ o kantreal daoubleget, ur samm gantañ war e gein. Lavaret em eus kement-se da Cheun Gravelleg. Mousc'hoarzhin en deus ha lavaret : abaoe pell e ouzomp e vez ur Breizhad war al loar. "Ata ! n'e ke' posupl !" Ha me "Penaos e ouzit ez eo ur Breizhad ?" Netra aesoc'h ! Yann a vez graet anezhañ". Asa ! Yann ? Lavar pelloc'h Hag eñ : "Tad-kuñv va zad-kozh a zeskas kement-se digant ar re gozh. Emañ war al loar abaoe kantvedoù ha kantvedoù ur Breizhad. Yann-e-vec'h-lann eo e lesanv... Abalamour en doa laeret lann e park un amezeg eo bet kaset du-se d'ober pinijenn!"

Goñ 'ouzit bremañ penaos ober evit mont war al loar... E Breizh hon eus ijinadennoù gwelloc'h marc'had ha suroc'h eget an Amerikaned hag ar Rusianed.

G.S. Evit ar re berr o anaoudegezh war gredennoù ar bobl e tisplegomp piv eo Yann-e-vec'h-lann. Pa vez loargann, al loar en he gloria mundi evel e lavarere weler un tres warni. Ar C'hallaoued a wel ur fas, ar Vretoned a wel un den o kerzhout gant e samm.

GWENNOLE.

AAA 000 AAA 000 AAA 000

KAFE IWERZHONAT

Mignoned o doa lavaret din : Maz it da Iwerzhon e vo ret deoc'h tañva kafe giz-ar-vro. Hag o doa c'hoarzhin an dud evel p'emaint o c'hoari un dro-gamm bennak. Diwar neuze em boa c'hoant gouzout. Nebeut war-lerc'h edomp va c'hoar ha me e Dulenn; amzer hon devoa da bourmen ha da weladenniñ kêr ha marteze da gaout un tañva eus kafe ar vro. Hag ez ejomp en ur c'hafedi hag e kemennjomp degas deomp ur banne kafe iwerzhonat. Respontet e voe deomp ne vije ket servijet seurt evaj eno. Dipitet e oamp met digalonekaet avat ne oamp ket : kafe iwerzhonat ma oa anezhañ e rankemp kaout. Gwellañ tra a oa d'ober oa mont d'ar "syndicat d'initiative" da c'houlenn. Hag ez ejomp. Paotr ar burev a sellas ouzhimp hag a c'houlennas souezhet : "Ha roet eo bet deoc'h an aotre gant ho kerent ?" Pa lavarjomp dezhañ e oamp kozh a-walc'h da dremen hep aotre hor c'herent e asantas lavarout deomp ne vije kavet ar pezh a glaskemp nemet er "pubs" da lavarout eo en tiez a werzh boeson. Diskouez a reas deomp pelec'h oa an hini tostañ ; ha ni di.

Ar c'hafe a c'houlennimp a voe degaset deomp hep dale : ur worenad kafe-du gant ur pezh mell gwiskad dienn warnañ, setu pezh a weljomp. Na mat e tle bezañ a soñjomp ! Al lonkad kentañ a ziskouezas e oa saourus an dienn met yen ar c'hafe hag ouzhpenn e oa ur vlazennig gantañ. Na gredjomp ket klemm d'an ostizez : marteze e oa dres pezh hon doa goukennet.

.../...

Hag ur pennadig war-lerc'h rinset ganeomp hor gwerennoù, skañvaet hor pennoù ha c'hwekaet hor youl e ouimp mat n'eo ket ur banne kafe dinoaz eo a oa aet ganeomp : ur banne wiski hiraet gant un dakennig kafe du ha dienn ne lavaran ket.

Notenn : Er c'hafe iwerzhonat e vez lakaet kement eus pep tra : wiski, kafe ha dienn... Da dafvat !

Mona MAZE.

((((((((((((((((((())))))))))))))))))

R^{evr}, B^{ramm}... ha K^{aoc'h} !

E Kendalc'h Landreger edo ur plac'h - hec'h anv ne vo ket dezrevellet deoc'h - a zo bet feuket bras ouzh va c'hlevout o tistagañ ar goulen : " Da b'lec'h 'maoc'h o vont, da gaoc'hkezeka gant ur gordenn ?". Diwezhatoc'h war am eus klevet eo bet graet ac'hanomp-me ha va c'hile AbEnnez kablus ivez da lavarout gerioù "gros" ! gant an deilegez-se "tud dizoare ha dizereat". Oc'h ober kement-all e tiskoueze ar pañurkaezh plac'h n'anaveze ket mat ar brezhoneg. Anat-splann e pa frouezh un tiegezh-bourc'hiz-giz-gall. Daoust da Bariz, kêrbenn Bro-C'Hall kaout ar Vilin Ruz, al Lido, ar Mayol hag ur bern "boestoù-diwiskadeg" a galv an estrenien dre an noazh-broud ez eo dizereat lavarout "pose ton cul là" Aze emañ un dra a dleomp stourm outi. Ar brezhoneg a zo ur yezh yac'h evel an holl yezhoù poblel. N'eo ket abalamour e vez gerioù "seven" en ur yezh eo yac'h ar spered anezhi. Miromp ceunded spered hor yezh. Arabat- gours komz brezhoneg en ur stagañ ouzh pep ger ar ster gallek roet gant ar geriadur gallek-brezhonek. Ar gerioù "revr, bramm ha kaoc'h" n'o deus tamm ebet ar ster a vez roet d'ar gerioù gallek "cul, pet, merde".

Tud 'zo a zo feuket marteze gant va fennad. Arabat dezho mont larkoc'h ! Rak e lavaran krik-ha-krak ez eo glanoc'h alies ar bobl gant he yezh eeun eget n'ez eo lod eus al levrioù hag eus ar filmoù roet da lonkañ d'ar yaouankiz a-vremañ . N'eo ket ar gerioù a zo arouez breinded ar spered. Ar soñjoù displeget ganto ez eo. Ha piv a zo yac'hoc'h : Sagan pe Vadim pe ar paotr a skrivas ar ganaouenn-se kavet e dornskridoù Montroulez diouti e kemeran pozioù 'zo.

Evit kac'hat ez omp tout graet

Tout e tebromp evit kac'hat.

Aotrou, prins ha rouanez ha roue

Tout e kac'homp en anv Doue.

... En em revoltiñ ne dal netra

... Enep 'zo kumun er bed-ma.

An Eternel eus a viskoazh

A ra kac'hat ha gwreg ha gwaz.

.../...

Lavarout a ran eo yac'hoc'h a galz evit ar spered lenn seurt traou eget breinadurezh distaoret gant an dud droch a stur ar filmoùeriezh hag al lennegezh c'hall. Me 'gav yac'husoc'h klevout c'hoarzhadenn Yann-e-votoù-koad diwar glevout bourdoù eget gwelout ar minc'hoarzhoù melen ha foerellek a ziwan war muzelloù an dud o lenn levrioù 'zo. Setu perak eo hep mezh e skrivin en niverenn a zeu ur pennad diwarbenn troioù poblet a implij gerioù evel "revr, bramm ha K kaoc'h (respet deoc'h !). Sed aze evit echuiñ hag evit ho lakaat da gompren gwelloc'h pegen disheñvel eo spered hor yezh diouzh hini Bro-C'Hall : E Hanveg em eus klevet ha gwelet ur vaouez o lavarout d'he mab-bihan, ur babig anezhañ : "o ma revr lor, ma revrig lor" (lor = lous)... Ernault en deus dastumet ivez ur "ger a garantez" : "kaoc'h an dud" ! Ha pa lavarar diouzh ur paotrig : "Hennezh n'eo nemet un tamm revr-gaoc'h c'hoazh" e vez ur seurt karantez n'eo ket evit kompren eveljust ar plac'h a gomzen anezhi !

GWENNOLE.

-
- Prnet em eus ur walc'herez da'm gwreg. Ur road evit he deiz-ha-bloaz.
 - N'emañ ket o c'hortoz kement-se ?
 - Nann, gortoz a ra ur c'harr-tan.

~~XXXXXXXX~~

HI : Daoust ha va c'harout a reot pa vezin kozh ha divalav ?

Eñ : Dont a reoc'h da vezañ koshoc'h, va muiañ karet, met pas divalavoc'h...

E ti ar barver :

- Daoust ha n'em eus ket lamet ho parv dija ?
- Nann, bet em eus bet ar c'hleizennoù-mañ e-pad ar brezel.

- Perak e tennes an disglaverioù eus an trepas. Aon 'peus e vefent laeret gant hor c'houvidi ?

- Nann ! Hogen e c'hellfent o anavezout §

- Enocous e tle bezañ disto evelloc'h.
- Ya, un tammig.
- Kriz e tle bezañ ar yenijenn evidoc'h e-pad ar goañv.
- Ya, met n'eo ket an displijusañ. Ar gwashañ eo pa walc'hañ va dremm : ret eo din lakaat un tok a-hent-all ne welan ket e pelec'h e echu va dremm.

|| || || || || || || || || || || || || || ||

Raktres ur geriadur Brezhoneg. Brezhoneg
gant gwennael Maze

≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

A

B̄NNAN̄

R̄ S̄ < US

KUZHĀ

KO

R̄
Z

→ — — — — —

EUZUS

DIPLODOKUS

K̄

ENAVO

K
O
L

+

OUV

D
H
I
N
E
N
H

